

## KIS-386 – Deveradoù diwar Br. **-par-**, **-parzh-**.

(GE – 16 12 90)

Ar gedrann **-par-** a gaver e hBr. : **ampar**, **gubar(-)**, **gorpar-**, e Kb. : **peri**, **par-** ; He orin eo ar wrizienn *\*q<sup>w</sup>er-* "ober, savelañ, seveniñ" (DGVB, pp. 62, 281). E-kichen (ha deveret dioutañ moarvat, hervez L. FLEURIOT, DGVB, p. 281) emañ ar gedrann **-parzh-**, a gaver en arverioù ha deveradoù damheñvelster :

Br. **par** "tachad douar, logell ; poent, keñver" ; hBr. **parth**, Br. **parzh**, Kb. **parth** "lodenn, rann ; taread, ranndir".

hBr. **gupar** "a-gostez, en distro" ; hBr. **guparth** "pellaet, tennet a-gostez, en distro ; hBr. **imguparton** "en em dennañ a reont a-gostez" (DGVB, pp. 200, 219).

Kinnig a ran gwelout aze ur boulc'h, un danvez andon a dermenoù nevez. Da gaout un alberz eus al loazioù e vrastresin un daolennad deveradoù beziat ha bezus hervez un dornad rakgerioù.

1a	Ø <b>ampar-</b>	1b	<b>amparzh-</b>
2a	<b>arbar-</b>	2b	<b>arbarzh-</b>
3a	<b>darbar-</b>	3b	<b>darbarzh-</b>
4a	<b>daspar-</b>	4b	<b>dasparzh-</b>
5a	<b>debar-</b>	5b	<b>debarzh-</b>
6a	<b>dibar-</b>	6b	<b>dibarzh-</b>
7a	<b>dioubar-</b>	7b	<b>dioubarzh-</b>
8a	Ø <b>goubar-</b>	8b	Ø <b>goubarzh-</b>
9a	Ø <b>gourfar-</b>	9b	Ø <b>gourfarzh-</b>
10a	<b>hanbar-</b>	10b	<b>hanbarzh-</b>
11a	<b>kempar-</b>	11b	<b>kemparzh-</b>
12a	Ø <b>(-)par(-)</b>	12b	Ø <b>(-)parzh(-)</b>

Boneg ar seurtadoù arouezioù hag arouezennoù a ran ganto en daolennad diaraok :

**termen en arver er yezh lennegel.**

Ø **termen dezneuziet diwar an hBr.**

- **termen gerluniet en 20t kantved.**
- Ø *danvez termen dezneuziadus.*
- *danvez termen gerluniadus.*

**1a.** – Br. **amparañ** (< hBr. **ampar**) "furmiñ, krouiñ, savelañ, sevel un hollad diwar e elfennoù ; en Anadennoniezh, lakaat udb. da zinodiñ evel ster e maezienn an emouezañ ; er Bredelfennerezh, furmiñ un ensav, un ergerc'henn, nep luniadur eus ar bred". Merkañ ez arverer **amparañ** ken er c'hemeradurioù gwerc'hel ("sevel, frammañ, kenaozañ, adeiladiñ"), ken e kemeradurioù derc'hel, deskrivadurel (sk. : "ar gerioù oc'h **amparañ** ar frazenn"). Arver kentañ : SADED.

**2a.** – Br. **arbarañ** "prientiñ ur varc'hadourezh e sell d'he gwerzhañ". Gl. **conditionner**. Ger luniet diwar skouer **darbar**. Arver kentañ : SADED.

**3a.** – Br. **darbar**, Kn. **darbar**, Kb. **darpar**.

**4b.** – Br. **dasparzhañ** "rannañ, ingalañ (etre)". Ger luniet dindan levezon Kb. **dosbarthu**. Arver kentañ : SADED.

**5a.** – Br. **debarañ** "sevel, aozañ ha reiñ (da)" ; sk. : "testeni **debaret** gant ar Skol veur", "ar mezeg a **zebar** un ordrenañs d'e arval". Gl. **délivrer**. Arver kentañ : *Geriadur ar Vezekniezh* war ar stern.

**5b.** – Br. **debarzh** "lakaat udb. e kerz ub. dre berzh un diviz", Gl. **attribuer**, **adjuger**. Furm dibabet gant Roparz HEMON e GIBR. evel stumm peurunvan an termen roet gant GReg. '**dibarz**', o soliañ war GMB 162 oc'h ober an un ger eus Br. '**dibarz**', Kb. **dybarth**, Kn. **dybarth**. Hogen, Kb. **dybarth** zo displeget gant GPC 1113 : "[**dy**-<sup>1</sup>+**parth**, ymgais i drosi'r S. *department*] department, separation." ; na ster, na lugnidigezh an termen Kb. ne aotreont enta da welout ennañ an un ger ha Br. '**dibarz**'. Evit Kn. **dybarth** "separation, division, parting, segregation" (NCED 45), evitañ da vezañ damheñvelster gant Kb. **dybarth**, n'emañ ket ennañ an hevelep rakger : Kb. **dy**-<sup>1</sup> zo Kn. **de-**, Br. **de-** (< Kt. \***do-**) ; Kb. **di-** zo Kn. **dy-**, Br. **di-** (< Kt. \***dī-**). Ar mesk c'hoarvezet ken abred hag ar krBr. etre **de-** ha **di-** zo bet diluziet gant VALLEE ; en degouezh-mañ ned eo ket soliet ar reizhadenn '**debarzh**' kinniget gant Roparz HEMON evit '**dibarz**' ; kenkoulz all, e ro VALL. '**dibarz**' hep "reizhadenn".

Alese ar stumm dalc'het gant KIS : **dibarzh** "dibab" ([01 02 96 – sk. : Br. "**dibarzh** a vez gant koumananterion rouedadou 'zo", Gl. : "**possibilité** offerte aux abonnés de certains réseaux"]), hag an eil furm Br. **debarzh** (**de+****parzh**), nevezc'her.

**6b.** – Sl. **5b.**

**7b.** – Br. **dioubarzhañ**, termen kinniget gant Turiaw AR MENTEG e *Bonreizh feizoniezh*, “Gr. ajfopivzw, Gl. **mettre à part**” (sl. Stagadenn).

**8a.** – Br. **goubarañ** "(Bredelfennerezh) distrollañ un devez pe ur real e doare ma'z eo torret ar stagoù gant dezevoù all pe ar peurrest eus ar buhezadur (GBLF, ¶ 677). (Kimiezh) tennañ ur c'horf eeun eus ur c'hediad (KIS-383, AIII1c, p. ). (Bevoniezh) tennañ ur virus eus ur metou (KIS-383, id., ibid.)

Br. **goubar**, **goubarel**, h.a., Gl. **abstrait**, sl. KIS-

**8b.** – Br. **goubarzh** g., **goubarzhelezh** b. "doare dibarek er gevredadelezh", Gl. **particularité** ; Br. **goubarzhegezh** b., **goubarzhelouriezh** b. "tuadur, emzalc'h, oberoù renet gant ur strollenn da arzerc'hel he doareoù dibarek", Gl. **particularisme**. Arver kentañ : *Emsav*.

**10a.** – Br. **hanbarus** aa. "(Mezekniezh) o werediñ e doareoù 'zo hepken" ; sk. : Br. “gwered **hanbarus** ur bevastaler war ur garveg”, Gl. : “l'action **élective** d'un antibiotique sur un germe” ; Br. “ankoun **hanbarus**”, Gl. “amnésie **élective**”. Arver kentañ : *Geriadur ar Vezekniezh* war ar stern.

**10b.** – Br. **hanbarzh** g. “disparti (ar gouennoù, h.a.)”, Gl. **ségrégation**. Arver kentañ : SADED.

Da dostaat emañ an nevezc'her Br. **disparzh** g., Gl. **discrimination**, a vije en e lec'h en daolennad diaraok (sl. KIS-266, La-08, p. 107).

**11b.** – Br. ; **kemparzh** g. "kempenn parzhioù heñvel, par o mentoù, urzhiet heñvel" (Da-63, p. 18), Gl. **symétrie**. Kentañ arver : SADED Fiz-9.

**12a** – Br. **-parañ** "(Bevoniezh) argerzh furmiñ un organ, un danvezenn" ; sk. “Br. **gwadparañ**, Gl. **hématopoïèse** ; Br. **behinbarañ**, Gl. **adipogenèse**”. Arver kentañ : *Geriadur ar Vezekniezh* war ar stern. Sl. ivez KIS-173, La-07, pp. 50 hh.

Br. **parenn** b. “(Alvezoniezh, Bevoniezh) pep hini eus an elfennoù o kendaoliñ d'un argerzh, Gl. **facteur**” ; sk. : “Br. **parennoù** ar c'haoulediñ, Gl. les **facteurs** de la coagulation ; Br. **parenn** diaskus, Gl. **facteur** déclenchant”. Kentañ arver : *Geriadur ar Vezekniezh* war ar stern. Sl. ivez KIS-270, La-08, p. 117.

Amañ e tere ouzhpennañ :

Br. **periad** g. (< \**q<sup>w</sup>er-*, Kb. **peri**) "(Jedoniezh) pep hini eus an niveroù a liesaer kenetrezo”, Gl. **facteur** ; [(01 02 96) sk. : “Br. **periad** kembloc'hañ, Gl. **facteur** de groupage” (GSTL, ¶ 1650).]

[(01 02 96) Br. **periant** g. (< \*q<sup>w</sup>er-, kv. Kb. **peiriant**) "(Stlenneg) hollad an elfennoù alvezel o talvoud da geweriañ ar stlenn" (GSTL, ¶ 2490), Sz. **hardware**, Gl. **matériel**.]

**12b.** – Br. **parzh** g. E-maez arver ez eas ar ger-mañ e krBr. m'en kaver c'hoazh e troiennoù evel '**parz dre parz**' Cb (GMB 463). Er brezhoneg lennegel en en kaved e deveradoù niverus : **a-barzh**, **diabarzh**, **e-barzh**, **palefarzh**, **trifarzh**, h.a. Lakaet e voe en arver en-dro gant SADED (sl. Da-64, p. 99) a astennas a-du-rall roll e zeveradoù : **rannbarzh**, h.a. Evit arverioù arbennik Br. **parzh** hag e zeveradoù er Yezhoniezh, sl. KIS-144, La-07, pp. 11 hh. [(01 02 96) "Br. **parzh elektronek**, Gl. **composant électronique**" (GSTL ¶ 815).]

Br. **parzhiañ** (e), Gl. **faire partie** (de) a geveneber da **perzhiañ** (e), Gl. **prendre part** (à), **participer** (à) [(01 02 96) sl. GEAK., p. 162.]

Br. **parzhiat** aa., **parzhiad** g.-ed, Gl. **composant** a geveneber da Br. **perzhiat** aa., **perzhiad** g.-ed, Gl. **participant**, sl. ivez KIS-316, La-08, p. 245 n. [(01 02 96) Da ouzhpennañ amañ : Br. **parzhek** aa. (e), Gl. **faisant partie** (de) (GEAK, p. 162).]

[(01 02 69) Br. **parzhiñ**, **parzhadur** g. "(Stlenneg) lodañ un trevnad en istrevnadoù hervez un pe lies dezverk, Gl. **partition**" ; Br. **parzhad** g.-où (GSTL, ¶ 3038) ; "(Stlenneg) rannvaez memor derannet d'ur goulev da geñver un erounezadenn el liesgouleviñ, Gl. **partition**" (GSTL, ¶ 3039).]

#### STAGADENN

(GE da TAM – 23 07 90)

Sevel a rez ivez ur Br. **dioubarzhañ**, Sz. **set apart**, Al **sondern**, Gl. **mettre à part**, a hañval din bezañ kenglotus mat, mar en loer er steudadoù :

Kb. **gogelu** "o take care ; care for, keep, guard, defend" ;

Kb. **diogelu** "to make safe, fasten, secure ; assure, confirm" ; Br. **diogeliñ**.

Kb. ?<sup>1</sup>

---

<sup>1</sup> Ur Kb. **goferu** ez eus, o tont eus an un gwr. \*bher- hag an un rakger \*<sup>w</sup>o- ha Kb. **dioferaf**, Br. **dioueriñ** ; un naoz all zo bet d'e ster avat, pa dalvez dreist-holl "to derive, emanate, gush, stream, run ; cause to flow, pour ; overflow" ; Br. **gouer**, **gouerañ**, **goueriañ** ; ne c'haller ket

Kb. **dioferaf** [bko.1.un. eus **diofred(u)**, **diofryd(u)**] "to renounce or deny an oath ; set apart, devote, consecrate" ; Br. **dioueriñ**.

Ha, da heul, da saveladenn :

Br. **goubarzh** (hBr. **guparth** "remota : éloignée, retirée, à l'écart") ;

Br. **dioubarzhañ** "mettre à part".

E se, ez advevaez ar rumm verboù diwar ar rakger **diou-**, ennañ **di-** kreñvaat ; keñveriañ hBr. **guparton** "ils éloignent", Br. **dioubarzhañ** "mettre à part". Ur rakger kemplezh eo hag an deveradoù diwarnañ a zleo bezañ savet gant ar brasañ aked.

---

lavarout ez eo peurestren ar sterioù ; koulskoude, ez eo gwell na reiñ Kb. **dioferaf**, Br. **dioueriñ** evel "deveradoù" diwar Kb. **goferu**, Br. **gouerañ**.